



HISTOR ADMIRABL Demeus ar Boudedeo

*Pehini, abaoe maro hor Zalver, ne ra nemet bale
nos ha deiz ac'hann da fin ar bed, abalamour
d'an effronteri an devoa bet en andret hor Zalver
Jesus-Christ, pehini, pa voa o vont d'ar maro
a falvezas dezàn disquiza ver e stal, hac e teuas
d'en rebuti evel eur scelerat.*



Var ton : Guerx Santez Anna

Asistantet enorabl, tostaît da glêvet
Ar vuez pitoyapla a voe biscoas er bed ;
An histor zo truezus demeus ar Boudedeo.
A zo nôs-deiz o vale aboe hor Zalver maro.

Eus a dribu Nephtali, a guêr Jerusalem,
Voa ganet Absarius, carguet a anathem ;
Dont a ras ar bed-mâ en amzer Herodes.
A felveas massacri Jesus, Mab ar Verç'hez.

Va zad a voa ur c'halve, va mam quemenerex,
Hac a labourer en Templ da ober broderes ;
Ha va c'herent am desgas da lenn leor al lezen,
Hac hini ar Brofetet ivez a dre certain.

Goude e voen demeet gant va c'herent afin
Da eur vreg fur a prudent a tribu Benjamin,
A bini'm boe tri bugel en amzer ma teuas
Autrou Sant Yan Badezour d'annonç ar Messias.

Sant Yan a gontertissas calz eus ar bayonet
Pere voa idolatret, caledet er pec'het :
Dec mil den en eun devez en deveus badeet,
Me, va greg, va bugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaras din : va fried, emezi,
Leqomp en em vadezi, enont e ar Messi ;
Ha me o respont dezi gant un ear direspert :
Na ni nac hor bugale ne vimp qet badeet.

Aben eun nebeut goude Sant Yan voe dibenne
Dre urz roue Herodes, eun den cruel meurbet,
Ha ma teuas hor Zalver evit ren en e blaç ;
Hac a ras dre ar c'hanton calz a viraclou bras.

Clêvet e meus bet Jcsus alies o sermon,
Hep ne meus bet profitet eus e bredication ;
Va-unan e voa present p'en doa rassaziet
Dec mil den gant pemp bara ha goudeze pesquet.

Me Boudedeo maleürus a velas c'hoas souden
Jesus o ressucita Lazar, breur Madalen,
Ha güelet dibossedi calz a dud possedet,
Ha sivoas din, pec'her bras, ne meus tam profitet.

Aben eun nebeut goude voe Jesus qemeret
Gant calz eus a judevien er jardin Olivet,
Ha condaonet gant Pilat da rancout da zouguen
Ar groas ponner ha mezus evit ar bec'herien.

Pa voe ar groas achuet, hor Zalver voe samet,
Da vont da venez Calvar da vea crucifiet :
O velet an dud o redeç, me guemer va buguel,
Ha me mont da dal an nôr pa yê en da vervel.

Cetu Jesus o tremem neuze abiou va zi,
Pehini en tal va stal a deu da reposi,
Ha me lavarai deân gant eur gomz arrogant :
Qê alesse eus va stal, te zo eun den mechânt.

Ganes ôn dizenoret gant da ifronteri,
Pa quêlân o reposi amân e tal va zi :
Querz alesse, den ingrat, cos sorcer milliguel,
Querz alesse d'ar maro, pe c'heus he meritet.

Jesus a resbontas dîn gant eur voez truezus :
Mont a ran da hartia, den fall, den maleürus,
Me reposo gant va Zad, te valeo bepret
Dre bêvar c'horn ar bed-mâ ac'han da fin ar bed.

— —
Ia, te veleo ac'han d'ar jujamant,
Hac er c'hoste deo d'am Zad am velo suramant
O varni ar bec'herien pere vo condaonet
Da vont d'ar flamou gries, ar re just d'ar joaüstet.

Pa glêvis comzou Jesus, va c'halon voe touchet,
Ha me rêi va bugale en istant d'am pried,
Ma velis ar Veronic o sec'hi bisach Jesus.
Ha chom en he mouchouer e boltret truezus,

He ellout n'em arrêti e heuillis hor Zaluer.
Hac e velis va Jesus ha calz graguez santel :
Ar bourrevien d'ar Verc'hez o deveus lavaret :
Cetu amâ an tachou ma vo ho Mab staguet.

P'am boe güelet hor Zalver o vervel var ar groas
E creiz etre an daou laer carguet a boanniou bras,
Ha me commanç va beach gant calz eus a anquen,
O tont da laret adieu da guær Jerusalem.

Sônjit eta, Bretonet, peguement a c'hlaç'har
En deus ar Boudedeo brema var an douar !
Rancout quïttal e gartier, e vreg, e vugale,
Hep qimiadi diouto, evit atao bale.

Pa en devoe baleet eun nombr a vlaveziou,
Ec' êruas en Ejipt, pel bras demeus e vrô,
Eno e mâ ar Mor-Rus, elec'h m'oe tremenet
Moyse gant pobl Doue, hep cavout drouc ebet.

Mont a ris eus ac'hane da enezen Candi,
Elec'h emedi en noas an dud a zo enni ;
Eno e velis eun tad o trec'hi a damou
E vere'h evit sacrific da rêi d'o doueou.

Mont a ris da Malhodo, e pelec'h eus tud drol,
Pere a ador Doue hac an diaoulou oll ;
Pedi reont Doue da gaout prosperite,
Hac an diaoul a bedont ne raï qet drouc dêze.

Güelet e meus er Japon ur vam meurbet cruel,
P'ni'deuas da laza, sivoas, e daou buguel.
Er vrô-ze ê permettet laza ar bugale
pa n'o deus quet a vara da rêi dêze.

Goude'gemeris an hent da vont d'an Enezi,
D'en Americ, d'an Asi, ha neuze d'an Turki.
Ar graguez eus ar vrô-se a vale d'an arme,
Hac an ezac'h o deus soign demeus ar vugale.

Eno emedi ar c'his da laza ar botret,
Nemet unan dre famill na ve james miret.
Bez'o deus eur rouanez a ro commandamant
Da laza an oll botret, hep caout dê nep damant.

Er guær eus a Garniol eus ur c'his drol meurbet
Rac eno an dud yaouanc, pa vezont eureujet,
E rânco ar vreg yaouanc, nôs genta e heured,
Mont da gousqet gant ar prinç, vit bea enoret.

Bet òn ebars eur c'hoad hanvet Cisaria,
 Elec'h ma eller bale cant lêo d'an nebeuta
 Hep cavet dour da eva, na feunteun, na rivier,
 Ar pezh zo goal incomod da oll dud ar c'hartier.

Monet a pis c'hoas pelloc'h, d'ar guær a Vosopa
 Pini zo eus he divoal eur prinç eus an drola :
 Ur vanden chaça merc'het en deus evit gardou,
 Ha n'en deus qen soudarded evit difen e vrô.

Ac'hane'yis da eur guær zo hanvet Estopet,
 Elec'h ma zeus serpentet ha loened vil me urbet
 Zo qer teo ha cori un den sur ma vent muzuret,
 O deveus d'an nebeuta daou-uguent troated het.

Er spaç demeus a gant vloas ez òn bet o vale
 Ha me êruont adare em brô hac em c'hontre :
 Allas ! maro voa va greg coulz ha va bugale,
 Ha den ebet eus va brô certen n'am anavee.

Neuze e teuis da Rom, ebars en Itali,
 En amzer-ze e voa calz eus a c'hlaç'har enni ;
 Güelet 'ris marzeria nombr bras a gristenien,
 En defot ne renoncent d'o feiz ha do lezen.

Me a vale var ar môr coulz ha var an douar,
 Ha me partiel neuze evit ar Franç, bro rar !
 E Marseill, Bourdel, Paris, Niort, Naonet, Lyon
 Ac'hane da Vreiz-Izel, d'ar guær vrao a Roazon.

Güelet e meus Montroulez ne voa nemet eur choad
Ha güelet Brest ha Qemper ebars en douar prat,
Ha güelet ar gær a Is en e frosperite,
Hac ar guær a Lexo-i a meus güelet ive,

Güelet e meus Breiz-Izel en coad ha meneziau,
Ma zoat evel sovajet neuze ebars er vrô ;
Me a vel calz a guæriou er vro-se batisset,
A ra calz a chenchamant abaoue ma zôn bet.

Me vel ar guær a Roazon eur guær gaer batisset
Dol, Güenet ha Sant-Malo, Dinan hac an Naonet,
Sant-Briec ha Landreguer, Lanion, Montroulez,
Castel-Pol ha Lesneven ha Landerne ivez.

Ar c'hæriou ze meus güelet e coad hac e prajou
Pa deuis d'ober va veach qenta ebars er vrô ;
Cetu batisset Qemper, ha Brest ha Recouvranc,
Qemperle, Moelan, Kerahes ebars en assuranc.

Anfin, pa on condaonet gant Doue da vale,
Me zo bet en em gavet e creiz meur a arme ;
Canoliou a fusuliou, clezeyou, sabrennou,
Netra ne dè bet capabl d ræi din ar maro.

Bet on ebars en listria zo bet perisset,
Hac an dud a voa enne a meus güelet beuzet,
Ha me hanvet Boudedeo n'em bije drouc ebet :
Comzou Doue a rânco bea accomplisset,

Condaonet e zôn gantâ da chom var an douar ;
Comprenit oll christenien, emâ zo din glac'har !
Va zourmanchou er bed-mâ biqen na êchuo
Qen a deui Doue da varn ar beo hac ar maro.

Ar som eus a bemp goennec so em godel bepret
James ganet nep seurt clenvet me ne dòn attaqet
Bet dòn ebars en broyou elec'h m'oa ar vocen,
Hep na zeus stagnet ouzin na clenvet nac anquen.

Va boutou na va dillat james na uzont qet,
Dre bermission Doue a meus bet oflancet ;
Peder guez'h a meus redet pêvar horn ar bed-mâ,
Ha gnelet e meus ive calz chenchamant ennâ

Bremâ e zòn comancet da redec a bempet,
Hep ne dòn ambarasset gant dibri na cousqet ;
Gnelet a meus bet broyou zo bet oll revinèt
Ha calz demeus a guærou gant ar gurun dêvet.

Ne meus qet calz amzer evit chom da barlant
Me a gred e ma va zreid vargore glaou ardent,
Nan, ne zeus nemet Doue a elfe disclêria
Ar boanniou bras a souffràn qerqent ma reposân.

Pebes maleur ê din-me bea bet rebutet
Demeus a guichen va stal Jesus Salver ar bed
Pa voa o vont d'ar maro, da zont da zisquiza,
Ha me neuze dre valeur a zeuas d'e zispriza,

Emâ e ar maleur bras a meus var ar bed-mâ !
Emôn ataô o vale ouспен trivac'h cant vla,
Ha c'hoas e ranqân bale ac'han da fin ar bed :
Pedit Doue evidôn, ma zîn d'ar joanstet.

FIN

E Montroulez, eus'a imprimiri L'ANOE, 7, ru ar Pavé